


War hent ar merien



A partir de 4 ans

Dans un espace naturel qui convient à la promenade

Apprentissages : activité physique, concentration, travail d'équipe, prise de conscience de ce qu'est une société (la nôtre et/ou celle d'autres espèces), jeu de rôle, curiosité, imagination, lien à la nature

An dafar : netra

Kinnig ar raktres (er goudor ma eo yen pe gleb):

Emaomp o vont da c'hoari a-stroll/asambles. **War hent ar merien** eo anv ar c'hoari. Tout an dud a oar petra eo ar merien ? Ur veriennen/merien

Deskiñ tudennoù a zo e-barzh kevredigezh ar merien :

- ar merien rouanez : tevoc'h eget ar re all , dozviñ a reont vioù, mammoù ar gevredigezh int.
- ar prinsezed gant divaskell a vo rouanez pa vint dimezet gant ur par (ur paotr)
- ar bared (paotred) gant divaskell a za doublañ gant ar prinsezed evit ober merien vihan.
- ar merien-labour a zo karget eus magañ ar re vihan, dastum ar boued hag an dafar evit ar verioneg (ti ar merien)
- ar merien-soudarded a zo karget eus an difenn.

Reolenn ar c'hoari : **Diwallit : arabat distrujañ an natur !**

Pa vimp er c'hoad e vo graet ur bourmenadenn evel ar merien da lavaret eo unan war lec'h egile. Merien-labour e vioc'h. O labour eo dastum boued ha dafar evit sevel ar merioneg (ti ar merien).

Pa vo dastumet **un dra** gant an hini gentañ e vo roet an dastumadeg d'an hini a zo war lec'h ha d'an hini war lec'h betek fin an heuliadenn. An hini he doa dastumet a zaio betek fin an heuliadenn. Hag e vo an eil hag a vo an hini gentañ. Graet e vo ar memestra betek e vo dastumet un dra gant pep merienenn.


Mont pelloc'h :

- ma z eo hir ar bourmenadenn e vo ober un dro dastum all.
- Sell ouzh an dastumadeg : pep hini a c'hell lavar petra en deus dastumet ha perak (boued, bag, neizh, un dra brav...)
- Pouezhus eo labourat a-stroll : memestra evit ar merien eget ar skolidi eget an dud deuet. Kustumet eo ar merien d'ober pep tra asamblez : bouetañ ar re vihan, difenn, sevel ar merioneg


Ober

Pa omp engavet er c'hoad : goulenn gant ar vugale da adispleg ar pezh vo graet ganto, ar c'hoari.


Sevel ar round pe ur vananezenn . Prest oc'h? ... Krogit!



Un heuliadenn merien : an eil war lec'h egile



ur verienenn gant divaskell



ur verienenn - labour